

KANAOUEN NEVEZ

ENN HENOR

D'AR WERCH'EZ VARI.

(Kenniget da Berson Sant-Lorans)

gant B. Vitmarke

WAR EUN TON NEVEZ.

Diskan.

Peger kaer ez eo Mamm Jezuz !

Pegen dous ha trugarezuz ! (bis)

Peger mad ha madelezuz !

Lavar d'i-me, den an Arvor,

Ha ker kaer eo da vag war vor,

Gand he gweliou gwenn-kann digor ?

Peger kaer ez eo...

Lavar d'i-me, den an Argoad,

Ha ker kaer deliou glaz ar c'hoad,

Pa zeu eur bann-heol d'ho sklerat !

Peger kaer...

Lavar d'i-me, den ann Arre,

Lein ar memez ha ker kaer e,

Gwenn-kann gand ann erc'h d'ar beure ?

Peger kaer...

Lavar d'i-me, potr ann denved,
Hag hen zo stereden e-bed
Ker kaer enn noz steredennet ?

Peger kaer...

Leret d'i-me, tud ar mezou,
Ha ker kaer eo ar glazennou,
O lintri gand ar glizennou ?

Peger kaer...

Leret d'i-me, bugaligou,
Er prajou o kutuil bleuniou
Ha bleun ker kaer zo er prajou ?

Peger kaer...

Nag enn Arvor, nag enn Argoad,
Er menez, enn oabl, nag er prad,
Netra ker kaer, netra ker mad !

Peger kaer ez eo Mamm Jezuz !

Pegen drant ha trugarezuz ! (bis)

Peger mad ha madelezuz !

